


AR LAN

Komzou gant Loïz Pors-Ikel, ton gantan O. 'n abad Rannou.

Gant nerz




Bet eo meu - let an de - ro glaz



an a - va - len hag ar fao braz.


rall.




An dil-hen goz e pen an ti, Ar gis ti-




nen, he frouez ganti, Ar sper-nen



wen an - i - vi - nen. Ar bruk ruz



ar ha-nel me - len. Nag ar lan



3

Al lan 'zo mignon d'ar Breizad ;
Pa zev ar reo glazur ar prad,
Lan a ve krennet ha blonset,
Gantan 've maget ar ronset.
Gant lan e ve gorret ar forn,
Hag ekreiz ar granv, pa ra skorr,
An tiegez endro d'an tan
A domm gant lan.

4

Bet oc'h da Ouel-Yan war ar roz?
Nag a dantad ekreiz an noz!
Lan berniet ken uhel ha tour
A zoug da zant Yan-Vadezour,
Ken lies a flammijen gaer
'Vel a stereden 'zo en aer;
Koantiz hon gerjer e pedi !...
Pebez dudi!

5

Al lan zo devot ha zantel;
El lan e hirvoud an avel
'Vel eur beden pe eur c'hlemvan.
Perak, kristen, na rit-hu van
Pa bik ho torn eus hen kempen ?
— Digas a ra zont eus ar Pen
Bet kurunet gant drein noazus,
Eus pen Jezuz.

6

Aboue 'zo gerreg 'lez ar mor,
A zo lan war douar Arvor,
Pa ziskennas hon ebestel
Eus a Vreiz-Veur e Breiz-Izel,
Kaer oa gwelet, tostik d'an od,
Eun ôter savet war ar geod,
Ha lan melen da vokejou
Tro d'hon Otrou.

7

Dré 'r menciou, ar c'hoajou don,
E vije klevet o tistôn
Mouez Tual, Gweltas hag Herve,
Labourerien ar park neve ;
Mes, dre ma steuent an ero,
Da viret an had tro-war-dro,
Lan a zave, lan p'omm ar stard,
Vel eur zoudard.

8

Here ar zent a ziwanas ;
Pell-amzer hon bro hen medas.
Mes setu deut amprevanet,
Pe brenved en Ifern ganet,
Hag a skuilh o binim flerius
War irvi hon zent glorius!...
Miret c'hoaz ed an Aviel,
Lan Breiz-Izell!

GALVADEN

da ziski dre vemor ha da laret a vouez uhel

Da greiz ar geant, pa yud ar blei er c'hoad,
'N hon izili e ruilh yenc'h ar gwad,
Divrec'h ar vamm d'he bugel zo digor,
Ha war bep lec'h e prener kloz an nor
Pa red er vro ki klanv pe dorfetour,
'Nez plomm pe dir na vale beajour;
Mar teu bosen, terc'hen-domm pe ar vrec'h,
Piou eo'n hini n'en em ziwall gant nec'h?
Mad, ma broiz, me glev blei o yudal;
Me 'wel chas klanv, me vel torfetourien,
Meur a gienved o skei ar gristenien,
Hag hon bro ger kaset gante da fall!

Bleidi a yud? — Ya, bleidi an Ifern!
Drouk-sperejou a ziroll, bern-war-vern
Eus ar puns du 'lec'h ma oant chadennet
Da ziframma enec'h Bretoned.
Chilaou! Chilaou! « Hou! Hou! Ken a Zoue!
» Jezuz d'an traou ha Satan da Roue!
» Ken a liz! Ken a gatekizou!
» Ken a beden! Ken a zakramanchou!
» Gwaz d'an hini en dije dienez!
» Ermaez kement zo warnan liou kristen!
» D'imp-ni an dud, ha d'imp-ni d'o c'helen!
» Ermaez, dreist-oli, beleg ha leanez!»
Chas klanv a zo? — Oh! ya, chas klanv spontus;
Gwenha ra a warnan gant o telen telen,
Izel o lost hag er pign o lanchen,
Eus o genou e kouez ar vaviten.
Ar chas klanv-ma a zo chas daou-droadek:
Ar gounar ru hag o lak da redek
A zo plantet 'n o c'horf gant Lusifer...
Bugaligou, tud yaouank, diwallet,
Beza kroget a zo 'r walen galet,
Rak o binim a zo loskus ha ter.

Torfetourien a zo ive war dro?
— O ma Doue, pa zellan ouz ma bro,
E seblant d'in gwelet Jezuz er Groaz,
Ha bourrevien o tispén e gorf noaz!
War ar C'halvar oa stank ar pec'hejou:
Memez fulor ha memez blasphemou
A zo bepred warlerc'h Zalver ar bed,
Hag, en e lec'h an Iliz, e Bried,
A zo laeret, goapeet, heskinet,
'Vel na viken touez er Sarraïnet.
Beza zo tud hag a c'hoarz war he foan!
Tud lent ha lous, henvel ouz ar ioen vil
A grog en den dalc'hmad dre choug-e gil
Ha nan eo krenv 'meid enep ar re wan.
Na klenvejou? — Oh! Klenvejou direiz!
Ar sperejou, ar c'halonou, e Breiz,
'Vel e lec'h all, a zo ampoëzonet
Gant komjou fall ha gant skrijou daonet,
Klenved grevus an dizentidigez,
Naon enoriou, sec'hed pinvidigez,
C'hoant plijadur, ha pebez plijadur!!!...
Setu aze, siouaz! an droug hudur

A wask ar vro hag he lako a-blad,
Mar na deu c'noaz grâs Doue d'he yac'ad.
Me a glev c'hôs en ker, pa dremenan,
C'hôs war ar mez, c'hôs er pors, c'hôs en ti;
Allaz! torfed a zigas ar gasti;
C'hôs ar maro a zonj d'in a glevan.
Mammen fonnus ar chaâra vertuiou,
Douar ar zent, temzet gant onestiz,
Skouer an enor kouls hag ar vaillantiz,

O Breiz-Izel, merc'h da Zantez Anna,
Daoust ha c'houi ve goest da fall-galonna?
Nan, nan, biken, o mamm garantezus,
Na lak warnoc'h Satan e yeo mezus!...
Piou a reas penn da Cesar gwechal-goz?
Piou a c'harzaz ouz ar Gall hag ar Zoz?
Piou a drec'has war an hugenoded?
Hag en amzer ma lement ar vue
Digant an neb a anzave Doue,
Piou da Zoue a viras lealded?

Setu burzudou hon zadou,
Breiziz, kerzomp war o roudou,
Pa red o gwad 'n hon gwaziou!

Roomp hon c'halon a-bez-kaer
Da garout Kalon hon Zalver